


MALEURIOU AR VRO



1

Me o ped koz ha yaouank, da zont holl d'am c'hlevet,
Da glevet kombjo kalet a zo kri da laret
Ma speret a zo dinerz vit diskleir kemen-man,
Evit dont da gompozi, ha da c'haloud skrivan.

2

Breman zo bloaz hag ouspen, holl a oamp penvolet,
Kreis ar walen oa n'hon bro renet gant ar Bochet.
Tannan ha lahan a reint hep raison na digare,
Ar re goz, ar re yaouank, ha koulz ar vugale.

3

An holl dud oant ken vit bale na mont gant ar necho
Hep bean bemde an risk da gavet o maro.
Pe na gaveint herve o jonz ken e war ar necho,
A oant krog da c'haloupat ar parkou hag ar c'hoajo.

4

Henan d'ant bet kavet tud evit stourn diontez,
Ha neuzen an araj braz a kroges an henez.
Maleur eta d'an hini gantez vije tapet,
Zoufr a re poaniou spontus rog bean fusuiet.

5

Dre aman deus graet ravaj en dro da goat Portuot,
En Sant-Servais, Sant-Nigoudem, ha muoc'h c'hoas en Duault
Henan d'ant bet gouveet divoa non refujiet,
Ar re a res de brezel, hanvet ar batriotet.

6

Reman na komandaman gant o mestro dispar
Ha tro ha tro vijeint kasset ar Bochet d'an douar.
Hag evit n'em vanji pa n'oant ket vit mont ar c'hoat,
Oant komanset d'ataki re vije labourat.

Ar re vije kavet gantez ar parkou pe ar prajou,
 Goude bean maltretet a dremene d'an armou.
 Monet a reint da fouial ebars tout an tier
 A na oa nemet an tan vit an dra muhan dister.

Kri ha kalet oa d'an dud-ze bean ken rivinet,
 Rentet de an ludu o logeis hâg o loened.
 Lakaet deus bet d'ar maro daou ha tri deus memes ti
 Bed a deus devet an be re-all ebars n'ho zi.

Keise c'hoas en tu-all d'imp, en Parouz Plougonver
 Eur c'hrim braz oa kometet gant judevien Hitler,
 En tre gar Plougonver ha hini Pont-Melvez,
 Tal bilagen Garsonnal, lec'h tremen an train bemde.

Henan ar zulvez dabardez, ar c'houezec a viz ar vouen,
 Hon tourmant deus ar brassan, greske c'hoas eum anken.
 Ar Bochet oa deut henan gant o c'hamionou
 Da greski c'hoas e non bro niver o maleuriou.

Tremenet seiz eur d'an heol, ar c'houlz d'a n'em zeri.,
 Eur miliçian deus ar vro tiskuas he varbari.
 Eun tiegez deus kaer a vezat hec'h loened,
 O klevet tennou ken tost oa bet gwall spouronnet.

Ha ken a oant partiet gant o c'hamoniou
 Homan a chomes da goach an tu dre d'ar c'hleuiou.
 Ha neuzen pa oant tehet a teuas da velet,
 Pez a oa nevez dremen ha pez a da klevet.

E non arrud war ar lec'h homan velas netra
 Mes dre eun taol ar spouront he zell bar war on dra
 Kerkent a bartias da glask ammezeien,
 Da zonet sames ganti en tu-all d'ar linen.

Hag ar reman a teuas hep kalz a konfians
 Da pez a oa laret de divaint ket esperans
 Mes non avans o vajou, henan a d'ant kavet,
 Korvou seiz den yaouank e n'ho goad astenet.

Ar c'horvou-man oa lakaet en tu da traou d'ar linen,
 Goude bean fusuiet, ebars eun andouffen.
 Pebez spont evit an dud kaves ar c'horvou-ze
 E neur stad ken hudur nevez gollet ar vuhez.

Rak e rog taol ar maro ar seiz den yaouank-man
 A oa bet merzeriet tre daouzorn an tiran.
 Ha n'imp a hall sonjal an eur deus o maro
 Oa 'vitez eun eur gaer daer da guitaat o voaniou.

Ha neuzen tud vad an dro en deiz warlec'h a beure
 Lakeas ar c'horvou-ze en stad a brobriete.
 Deut a oar betek henan vit o fotografiou,
 Vit ma c'halcher divetoc'h o idantifiou.

An pevar horn ar vro ar helo a gerzas,
 Evit monet d'ho gwelet an dud a ziredas.
 Mes allaz! dre ar re, a oa bet tremenet,
 O hanoiou an deiz-ze voant ket diskleriet.

bet

Ha dre ordn an Otrou Mair a oant bet archedet,
 Goude ze a oant kasset d'an douar biniget.
 Eur bobl a dud a teuas evit o eskorti,
 Barz o beaj divezan, hag ive d'ho enori.

Penegwir oa tad na mamm da zaoulinan war o be
 An holl a oa keren d'an dud maleurus-ze.
 Hag an dro de oa nemet fleur ha kurunenou,
 Betek an deivejou kaer oa gouvet ho hanoiou.

Ar blaman skever an deiz oa tremen ar walen
 Zo kanet an Garsonnal gantez eun overen.
 Eun assistans niverus oa deut d'o enori
 'Vit diskoue oa dalc'het jonz deus o maro ken kri.

Deut a oant betek henan an otoriteou,
 'Vit ma c'halcheint war ar lec'h pronons o diskouriou.
 Laman oant bezet kavet e gant kalz ar c'hlaç'har
 Lec'h eur groaz, eur monumant, vo savet no memoar

Zetu aze mignonet, eur maleur deus ar brezel,
 Kalz jiuaz ! zo bet veltan, e non bro Breiz-Izel.
 Hag e war tout douar Vrans, fin an okupassion,
 A zo bet tremenet amzer gwall divesson.

Ni o ped d'am jilaou, breman rog finissan,
 Re d'ouimp oa espernet deus kreis ar walen-man.
 Evit ar re zo maro felket d'imp o ankoaz,
 Ha zikouromp re akablet da zougen pouezans o c'hroaz.

(Composé, fin Juillet 1915. Reproduction Interdite)

François LE GALL,
 Bulat-Pestivien (C.-du-N.)

